



## Ma c'halonig a zo diaes – Mon petit cœur souffre

Anna LUCAS – Kawan – Diskar-amzer 1979 (Cavan – Automne 1979)

Ma c'ha-lon-ig a zo di-aes 'bae on di-kri-et d'am mes-trez Dam dam de-ri-  
net-te O gwall di-kri-et on de-zhi Dam dam der-di

Ma c'halonig a zo diaes  
abae on dikriet d'am mestrez  
Dam dam derinette  
O gwall dikriet on dezhi  
Dam dam derdi

Lâret a zo dezhi oan bambocher  
Un ever gwin, ur pitouer  
Un ever gwin hag «eau-de-vie»

Mag evan gwin hen goar a ran  
Arc'hant am eus ha paeañ a ran  
Paeañ a ran ma gwin, ma «eau-de-vie»

«Ma mestrez din-me lavaret  
Pegoulz e vefomp dimezet  
Na pegoulz eta e timezfomp ni ?»

«Na pa vo arri kaer an onion  
E beg ar gwez en Lannuon  
Ha neuze vat e timezfomp ni !

Na pa vo arri kaer al lin  
War ar pavez en Gwerleskin  
O neuze vat e timezfomp ni !

Na pa vo arri kaer ar panes  
Kreiz ar mor bras e Montroulez  
O neuze vat e timezfomp ni !

Na pa vo arri kaer ar fleur  
War lost ar c'hog war dour Lanmeur  
O neuze vat e timezfomp ni !»

Ma ne zimezje nemet ar re goant  
Re vil a varvje gant ar c'hoant  
Na gant ar c'hoant da dimeziñ !

Ma ne zimezje nemet ar re baour  
Re binvidik e varvje gant o aour  
Na gant o aour e-barzh 'n o zi !

*Mon petit cœur souffre*  
*Depuis qu'on me critique auprès de ma maîtresse*  
*Dam dam derinette*  
*Je suis salement critiqué auprès d'elle*  
*Dam dam derdi*

*On lui a dit que je suis un fêtard*  
*Un buveur de vin, un paillard,*  
*Un buveur de vin et d'eau de vie !*

*Si je bois du vin, je le sais,*  
*J'ai de l'argent et je paie*  
*Je paie mon vin, mon eau de vie !*

*«Ma maîtresse, dites-moi,*  
*Quand serons nous mariés,*  
*Quand nous marierons nous ?»*

*«Quand les oignons seront devenus beaux*  
*A Lannion en haut des arbres*  
*Là pour sûr, nous nous marierons !*

*Quand le lin sera devenu beau*  
*Sur le pavé à Guerlesquin*  
*Là pour sûr, nous nous marierons !*

*Quand les panais seront beaux*  
*Au milieu de l'océan à Morlaix*  
*Là pour sûr, nous nous marierons !*

*Quand les fleurs seront belles*  
*Sur la queue du coq au clocher de Lanmeur*  
*Là pour sûr, nous nous marierons !»*

*S'il n'y avait que les belles à se marier*  
*Les moches mourraient d'envie,*  
*D'envie de se marier !*

*S'il n'y avait que les pauvres à se marier*  
*Les riches mourraient avec leur or,*  
*Avec leur or dans leur maison !*